

ADRIEN DE CARNÉ

Barz an Arvor



Kristen ha Breizad da virviken

LILIEN AR FOLGOAT

Mister kristen en eun arvest



BREST

4, Moullerez ru ar C'hastell, 4

—
1921

55 12
11
89
60


ADRIEN DE CARNE

Barz an Arvor

Kristen ha Breizad da virviken

LILIEN AR FOLGOAT

Mister kristen en eun arvest



BREST

4, Moullerez ru ar C'hastell, 4

1921

Oberoù A. de Carné, Barz an Arvor⁽¹⁾

Breiz karet, pezh-c'hoari e tri arvest.

Ar yalc'had aour, c'hoari farsus en eun arvest.

Ar mabig Jezuz, mister kristen en eun arvest.

Kristof ar C'hrenn, mister kristen en eun arvest.

An aotrou Flammig, c'hoari farsus e daou arvest.

Tarsisius, mister kristen en eun arvest.

Saig ar paotr fin, c'hoari farsus en eun arvest.

Barnedigez Doue, mister kristen en eun arvest.

Sac'h ar marichal, c'hoari farsus en eun arvest.

Judikaël, mister kristen en eun arvest.

Ar galoun vat, c'hoari plijadurus en eun arvest.

Ar c'hoz vedisin, c'hoari farsus en eun arvest.

Lilien ar Folgoat, mister kristen en eun arvest.

EVIT AR MERC'HED BIHAN

Noz nedeleg, mister kristen en eun arvest.

(1) Ar pestoù ma a gaver e Brest, e moullerez ru ar C'has téll, 4.

ARGUMENT

Salaun était un pauvre idiot qui vivait dans le creux d'un arbre, près de Lesneven. Il n'a jamais parlé qu'une seule fois dans sa vie, pour répondre à des soudards en glorifiant la Vierge Marie. Il ne savait que demander du pain et dire *Ave Maria*. Mais il répétait ces deux mots à tout instant, et avec une ferveur angélique. Ce petit drame le représente tout enfant, à l'école, vers 1320. Environ trente ans après, il meurt, le jour du 1^{er} novembre. La Sainte Vierge lui apparaît et lui donne, à ce moment suprême, l'intelligence et la parole. Miracle du lis. Le duc Jean IV, de passage à Lesneven pour les affaires de Bretagne, promet à la Vierge que, s'il est vainqueur de Charles de Blois, il construira une basilique sur le tombeau de Salaun ar Foll (1). Tout le peuple jure de contribuer à l'édification de l'église et chante, en chœur, *le Cantique des Lis*.

(1) L'intervention de Jean IV, et son vœu ne sont pas historiques. Quelques vieux chroniqueurs en parlent cependant. Cela nous suffit.

TUD AR MISTER

SALAUN, paotrig 10 vloaz.

SALAUN, deut da veza bras, 39 vloaz.

Tad da ZALAUN, labourer douar.

KOLOMBAN, manac'h, mestr skol.

ALAN, }
PAOL, } skolaerien vihan.
PER, }

YAN IV, dug Breiz.

KLAODA, }
TUGDUAL, } soudarded a du gant dug Breiz, gwal-
MAZE, } zivalo o zri.

JILDAS, labourer douar, koz awalc'h.

Rener kear Lesneven.

MIKEAL, paotr 12 vloaz.

Ar Werc'hez Vari.

Elez ouz he heuilh.

Eur ribitaill skolaerien.

Ofiserien oc'h heuilh dug Breiz.

Bugale.

Tud diwar ar meaz.

Kement ma a dremen e Breiz-Izel, e parrez Guik-Hellè, tost da Lesneven, er bloaz 1320, ha goude ze er bloaz 1350. Eur c'hoat bras. En eur c'horn, a gleiz, eur wezen goz, teo, ha kleuz bras.

KENTA LODEN

KENTA DIVIZ

KOLOMBAN, *e unan, o c'hervel bugale, a vouez krenv.*

Deuit holl 'ta ! deuit buhanoc'h 'ta ! Bez 'ez eus ama eul leac'h dudius kenan ; gwez brao, glazen fresk, bleun lan alaouret e pep tu, ha, tostik tost, eur feunteun gaer eus ar re gaera. Deuit, bugaligou, deuit ! *Daouzek paotrig a zeu, en eur red, eus a bep tu.*

II DIVIZ

KOLOMBAN, ALAN, PER, PAOL, BUGALE ALL.

ALAN

Gwir eo, va zad, ar pezh hoc'h eus lavaret. Eur feunteun eus ar baradoz eo ar feunteun ma. Ha redek a ra an dour diouti, atao hag atao, noz deiz, evelse ?

KOLOMBAN

Noz deiz, hep ehan ebet.

PER

Ha piou a laka kemend all a zour enni ?

KOLOMBAN

Piou ? An Aotrou Doue 'ta. Hen eo en deus krouet an dour da derri sec'hed an den, da walc'hi e gorf ha da walc'hi petra oc'hpenn ?

PER

N'ouzoun ket.

KOLOMBAN

Da walc'hi an eneou ive.

PAOL

Ia, sur ; me oar. An dour a walc'h ene bugelig nevez ganet pa vez roet d'ezan ar vadiziant. N'eo gwir, va zad ?

KOLOMBAN

Gwir bater. Lavaret mat ec'h eus, Paol.

ALAN, *o fiskouez ar wezen gleuz.*

Sellit ouz ar wezen goz ma, va zad. Nag hi a zo kleuz, va Doue, nag hen a zo doun an toull enni ! N'em eus gullet morse eur wezen ken divalo, ken iskis hag houma. An dud eo o deus divoedet er c'hiz se ar wezen baour ze ?

KOLOMBAN

Tamm ebed. Toullet eo bet nebeud a nebeud, gand ar gozni, gand an amzer. Krignet ha debret eo bet, ive, gand ar prenved, gand an amprevaned, ha gand al laboused.

PER

Mat. Ledan awalc'h eo breman he zoull evit ma c'hellfed en em ziwall ebarz dioc'h an heol ha dioc'h ar glao.

KOLOMBAN *d'an holl vugale.*

Peoc'h, breman. Poent eo ober eun tammig kentel, ha da genta, evel just, en em erbedi a raimp oc'h Itroun Varia. En hano an Tad, hag ar Mab, hag ar Spered Santel. Evelse bezet great. Me ho salud, Mari, leun a c'hras, an Aotrou Doue a zo ganeoc'h ; ben-niget oc'h dreist an holl gragez ha benniget eo ar frouez eus ho korf, Jezuz.

AR VUGALE, *a unan.*

Santez Mari, mamm da Zoue, pedit evidomp pec'herien, breman hag en-heur eus hor maro. Evelse bezet great.

KOLOMBAN

Mat. Azezit holl da genta. *An holl a azez.* Sao, Alan. *Alan a zav.* Petra eo eur mister ?

ALAN

Eur mister a zo eur wirionez na c'hellomp ket da gompren, hag a dleomp kredi evelato, abalamour m'eo bet diskleriet gant Doue, rak Doue ne c'hell na fazia e unan nag hor lakaat da fazia. *Ar vugale a ra eun tammig trouz o komz etrezo.*

KOLOMBAN

Roit peoc'h 'ta, bugale ; te oar mat da gentel, Alan ; eur paotr mat out. D'it te, breman, Paol, *Paol a zav,* ma welimp ha respount a ri ker brao hag Alan. Lavar d'in me ha n'ez eus nemet eun Doue hepken ?

PAOL

Nan, n'ez eus ha ne c'hell beza nemet eun Doue hepken.

KOLOMBAN

Mat kenan, Azez. Klevet mat ec'h eus, Perig, ar pez en deus lavaret Paol ?

PER, *o sevel.*

Ia, va zad.

KOLOMBAN

Ni welo. Petra eo mister an Dreinded ?

PER, *a vouez krenv.*

Tri Doue.

KOLOMBAN, *o c'hourdrouz eun tammig.*

O penn glaouik ! o penn skanv a baotr ! Ped gweach em eus lavaret d'it ez eus tri ferson e

Doue, mes ne d-int, o zri, nemed eur memes Doue
hepken ? Klevet mat a rez ar weach ma ?

PER

Ia, va zad.

KOLOMBAN

Lavar, neuze.

PER

Eun Doue hepken e tri ferson, an Tad, ar Mab,
har ar Spered Santel.

KOLOMBAN

Mat eo, erfin. N'ankounac'ha ket an dra ze, diwar-
vrema. Eun Doue ! Eun Doue hepken ! Ha te, va
Zalaun karet, daoust ha desket ec'h eus eun tammig
gwelloc'h da beden d'ar Werc'hez e latin ? Sao 'ta,
va c'heazig. *Salaun a zav*. Eur paotrig mat evel dout
a dle gouzout mat e bedennou. Lavar.

*SALAUN, o lakaat e zaouarn kroazet hag o sevel
e zaoulagad warzu an env.*

Ave Maria.

KOLOMBAN

Ia, mat ; ha goude ze ? *Salaun ne lavar grik*. La-
var 'ta.

SALAUN

Ave Maria.

KOLOMBAN

Gratiâ plena.

SALAUN

Ave Maria.

KOLOMBAN

Mat ; azez, mignounig paour, azez. Ha breman e
c'hellit holl kemeret eun tamm ebad, eun abadennig
c'hoari. *Ar vugale a zav holl*.

ALAN, *d'ar re all*.

Dansomp holl, mar plij d'eoc'h, en eur gana, a
unan, *Kanaouen al laboused*.

AN HOLL

Bras ! bras ! plijadur a vezo. *An holl en em laka
da ober eun dans-tro, en eur gana, nemet Salaun, a
jom tostik tost da Golomban.*

KANAOUEN AL LABOUSED

War don : Ar Pillaouer.

En doun eus ar c'hoat, e Breiz,
Ar goulm, e kichen e neiz,
Hed an deiz a vez laouen
O kana ke c'hanaouen.

Rou, rou, rou, eme ar goulmig,
Rou, rou, rou, gand he zonig.

An houldi, war ar stang vras,
Etouez ar raezennou glas,
Pa ganont holl, o mouesiou
A zon evel trompillou,

Koin, koin, koin, eme an haouadig,
Koin, koin, koin, gand e zonig.

E kreiz an derven, pa vez
Distro an amzer nevez,
Ar goukoug a gan, a gan,
Ken na zeuio gouel Sant Yan.

Kou, kou, kou, eme 'r goukougig,
Kou, kou, kou, gand he zonig.

A-hont, e ti va zud ker
Ar c'hillog, labous Sant Per,
A gan, bemdez, gant ar ier,
El liors hag er parkeier.

Kot, kot, kot, eme ar iarig.
Kot, kot, kot, gand he zonig.

PAOL, *d'ar re all.*

Greomp eur c'hoari all, breman. Deomp d'ar wezen gleuz. Ober a raimp eun ti soul, eun ti bihan anezi. Piou a ielo ebarz da genta ?

PER

Salaun !

AN HOLL, *laouen.*

Ia, ia, Salaun ! Deus 'ta, deus 'ta, Salaun. *Salaun a ia ganto goestad ; mont a ra er wezen gleuz, e zremm troet war zu an dud.*

ALAN, *d'ar re all.*

Sellit outan 'ta, sellit outan. Henvel eo ouz skeuden ar Mabig Jezuz.

PAOL

Henvel eo ouz eur zant bihan, en e doull-voger, en iliz parrez. Lavar eun dra bennak 'ta, Salaun ; gra eur brezenig d'eomp.

SALAUN, *o sellet ouz an env.*

Ave Maria ! *Er mare ma lavar Ave Maria, eur sklerder lugernus a gouez, dioc'h an env, war dal Salaun, er wezen gleuz. Kolomban en em strink war e zaoulin. Ar sklerder a ia kuit. Kolomban a zav.*

ALAN, *souezet.*

O va zad, eul luc'heden eo hon eus gwelet, ne ket 'ta ?

KOLOMBAN

Eul luc'heden ! gand an amzer vras ma ! N'eo ket, avat.

PER

Petra eo, neuze ?

KOLOMBAN, *o sonjal.*

N'ouzoun ket. N'eus fors, poent eo, breman, d'an holl, mont d'ar gear. It kuit. *An holl a ia kuit, Salaun ganto.*

III DIVIZ

KOLOMBAN, *e unan.*

Itoun Gwerc'hez Vari, me ho kar, her gouzout a rit, a greiz va c'haloun. Petra zo ? Souezet bras evel ma 'z oun, ho pidi a ran gand ar vrasa karantez. Ar sklerder hon eus gwelet, ar vugale ha me, o para war dal ar paotrig, a zeue eus ho perz, her c'hredi a ran start. *Tad da Zalaun a zeu, hep beza gwelet gant Kolomban.* Likit va c'haloun, Gwerc'hez Sakr, da veza glan ha dinam evel hini ar bugel paour ze, ha bezit benniget da viken.

IV DIVIZ

KOLOMBAN, TAD DA ZALAUN

AN TAD

Daoust ha n'edo ket bremaik ganeoc'h, va zad mat, eur vanden skloerien ?

KOLOMBAN

Eo, eo. Mez echu eo ar skol, hag em eus o c'haset holl d'ar gear, n'eus nemet eur pennad. Klask a rit unan anezo ?

AN TAD

Ia, va faour keaz paotrig Salaun. Ha desket en deus eun draig bennak ganeoc'h, va zad ? Hennez a zo berr e spered, allaz ! berr eus ar re verra.

KOLOMBAN

Va Doue, n'oun ket bet evit diski d'ezan n'eus fors petra, bihan evel ma 'z eo e skiant vat. E kenyer e bedennou zoken, ne oar netra, nemet daou c'her hepken : *Ave Maria*. N'eo ket bet evit mont pelloc'h er beden gaer ze ma saludomp ganti ar Werc'hez gloriüs Vari. Salaun a oar an daou c'her ze ha netra ken. Ne lavaro biken tra oc'hpenn, war va mennoz, da nebeuta.

AN TAD

Eur c'hlac'har vras eo evidoun, eur rann-galoun eus ar re boaniusa.

KOLOMBAN

Ar c'hontrol beo eo, va den mat, ar c'hontrol beo. Eleac'h gwela, red eo d'eoc'h en em laouenaat. Red eo d'eoc'h trugarekaat an Aotrou Doue gant holl nerz ho kaloun, hag her binniga evit e vadelez.

AN TAD

Souezet oun ganeoc'h, va zad. N'oun ket evit koumpren ar pezh a livirit.

KOLOMBAN

Koumpren a reot. Me, manac'h ha beleg, a oar lenn bete goueled an eneou ; mat ; me hel lavar d'eoc'h, ho paour keaz mab, evitan da veza diskiant evelse, a zo mat ha glan evel eun eal.

AN TAD

Penaos 'ta e c'hellit hu her gouzout, p'eo gwir e chom atao va faotrig paour hep lavaret na ger na grik ?

KOLOMBAN

N'em eus ezom ebet her c'hlevet o komz. Awalc'h eo d'in her gwelet pa lavar *Ave Maria* ! E zaoulagad a lugern, neuze, evel diou stereden eus an env, hag e zremm a zeu da veza koantoc'h eget ar goulou deiz.

AN TAD

N'em eus ket gwelet morse kemend all a draou kaer gantan.

KOLOMBAN

Mat ; me 'm eus gwelet, ha n'eus ket pell zoken. Bremaik e c'hoarie aman gand ar re all, o deus hel lekeat, evit c'hoarzin, er wezen gleuz a welit aze, Eur sklerijen gaer a baras en eun taol kount war e dal. Ar vugale a lavare : Eul luc'heden eo ! N'oa ket, avat, mez eur burzud o tont ; war eeun, eus ar baradoz. Me hel lavar d'eoc'h evit an eil weach. Binnigit an Aotrou Doue ha livirit, d'ezan, mil ha mil drugarez.

EIL LODEN

*An dra ma a dremen en hevelep leac'h, tregont
vloaz goude, war dro ar bloaz 1350.*

V DIVIZ

TUGDUAL, MAZE

*Maze, dem vezo, a zoug eur fouldrenn sac'h teo
ha pounner, a istribill ouz e skoaz.*

TUGDUAL

Ac'hanta ! Maze ; daoust hag ec'h eus kavet tu
ma, tu hont, kalz a draou mat da zibri evidomp ?

MAZE

Sell ouz ar zac'h ma ! Ha n'eo ket koenvet awalc'h
war da vennoz ? *O skei gand e zourn, war e zac'h.*
Leun eo, va moutig, leun a draouigou a bep seurt.

TUGDUAL

Traouigou kaer ?

MAZE

Kaeroc'h egedout, sur, rak te zo divalo, Tugdual,
te zo divalooc'h a zeiz e deiz, gand da zaoulagad.
pikous ha da fri kaouen. Ia, ia, Tugdual, ia.

TUGDUAL

Tao 'ta, Iann frank e c'houzoug. Petra ac'h eus er
zac'h se ?

MAZE, *fouge ennan.*

Bara, patatez, kig moc'h, ier, houldi, lapined, ha
me oar ? Hirio koan a vezo mat evidomp, va faotr.
Lip e bao an aotrou rener kear Lesneven ne vo ket
ken druz hag hon hini.

TUGDUAL

Feiz ! te zo sorser, Maze. Ha dioc'h peleac'h an
diaoul eo deuet ganef kemend all a draou lipous ?

MAZE

Ne ket diez. Kemeret em eus kementse holl en eun
tu pe du, dre gaer pe dre heg, digant tud diwar ar
meaz. Hag ar boued se a vezo gwelloc'h kalz eget ar
geusteuren a vez roet d'eomp, bemdez, e ti ar zou-
darded, diwar goust an aotrou Yan, kount Montfort
ha dug Breiz.

TUGDUAL, *laouen.*

Gwel a ze ; te zo eun den fin, Maze, te a zo lemm
da spered. Sell 'ta ! Setu Klaoda o tont davedomp.

VI DIVIZ

TUGDUAL, MAZE, KLAODA

KLAODA, *rust e vouez.*

Evit piou oc'h hu ?

TUGDUAL HA MAZE, *a unan.*

Evit Montfort.

KLAODA

Mat ; mar d-oc'h a du gant Montfort, digorit frank
ho tiousskouarn, ha selaout ar pezh am eus da lavaret
d'eoc'h a berz an aotrou rener kear Lesneven da
genta, ha, d'an eil, a berz hor c'habitan.

TUGDUAL

Selaou a reomp, *Maze a denn eur voutaill eus e zac'h hag a ev eur banne.*

KLAODA

An aotrou rener kear Lesneven a ro d'an holl, kelou diwarbenn ar brezel bet diskleriet etre Yan Monfort ha Charlez Bleiz. Tud fallakr, paët gand an enebourien, a ia hag a zeu bemdez eus an eil benn ar vro d'egile. Ar spierien ze, an drubarded se a vez gwelet en holl leac'hiou tro war dro. Neb a vezo paket oc'h ober taoliou iudaz er c'hiz se, a vo krouget, raktal, oc'h beg eur wezen. D'an hini en devezo paket unan eus ar riblerien ze, e vezo roet dek pez aour.

TUGDUAL

Vad a rafe d'in, sur, gounit evelse dek pez aour melen. Mes diez eo kregi er seurt tud se. Penaos e c'hellfemp anaout ar re ze, fin evel ma 'z int ?

KLAODA

Mat ; eur re bennak anezo a vez gwisket, alies, evel tud diwar ar meaz, gand dilhad eur miliner, pe zilhad eul labourer douar. Re all a zo warno gwis-kamanchou paour eur pillaouer, pe druillou eur c'hasker bara o lavaret e bater a zor da zor. Finoc'h int eget al louarn ar fina.

TUGDUAL

Me vo finoc'h c'hoaz ; me a c'hounezo, dizale, an dek pez aour, a gav d'in.

KLAODA

Daoust petra ?

TUGDUAL

Gwelet em eus, mintin ma, eul lampoun henvel poch ouz ar re ma komzez anezo, Klaoda.

KLAODA

E pelec'h ? *Maze a ev eur banne eus e voutaill.*

TUGDUAL

E Lesneven. Hennez a oa warnan; evel hel levereze, pillou lous ha roget eur c'hasker bara. Choum a rea, en e za, e tal dor kement ti a zo e kear.

KLAODA

Ha penaos e oa e zoare ?

TUGDUAL

Doare eun den hanter foll, a gav d'in.

KLAODA

Eun disfizians vras am eus, Tugdual, e kenver an den ze. Eun dra vat e ve, evidomp, her paka da welet evit mat piou e ve. *Maze a ev eur banne eus e voutaill.*

TUGDUAL, o sellet oc'h an tu deou.

Eaz e vézo, Klaoda. Setu hen o tremen, duhont, goustadik. Holla 'ta, paotr, deus aman eun tammig.

KLAODA

Choum a ra a za. Ne finv ket. N'ema ket o klask an tu da vont kuit. Deomp d'her c'herc'hat, Tugdual. *Tugdual ha Klaoda a ia kuit.*

VII DIVIZ

MAZE, e unan.

It atao, va mignouredigou, it atao. Evidoun me, avat, a gav gwelloc'h choum aman gant va boutail-lig keaz a ro d'in nerz ha levenez. Riou bras am eus, ha ne ket souez, tud vat, p'eo gwir eo hirio dervez kenta a viz du. Daou abeg am eus 'ta, da eva adarre ;

da genta ar ienien spountus a laka va c'haloun baour da grena ; d'an eil, hirio eo Gouel an Holl Zent ; eur gouel brao ne ket 'ta ? Red eo d'in, kristen mat evel ma 'z oun, eva eur banne da iec'het an holl zent hag an holl zantezed eus ar baradoz. *O c'hoarzin* Ha, ha, ha, ha, *Eva a ra*.

VIII DIVIZ

MAZE, KLAODA, TUGDUAL, SALAUN

MAZE, *o valbouzat*.

Aotrou klasker bara... me... me... ho salud.

KLAODA, *droug ennan*.

Ro peoc'h Maze ; te a laka va spered da drei gant da zorc'hennou. Kea kuit ; me az kaso d'an toull, sac'h gwin. Kea kuit. *Maze a jom hep flach*. Kea kuit 'ta. *Skei a ra gant Maze hag her bunta a daoliou treid en e ziadre. Maze a ia kuit en eur horjellat*.

IX DIVIZ

KLAODA, TUGDUAL, SALAUN.

KLAODA, *da Zalaun*.

Pe hano ac'h eus ? *Salaun ne respount tra*.

TUGDUAL

Piou a c'houarn ar vro ? *Salaun ne respount tra*.

KLAODA

Evit piou emañ ?

SALAUN, *krenv e vouez*.

Ne d-oun na Bleiz na Montfort, mes bevet ar Werc'hez Vari ! *Klaoda ha Tugdual a ziroll da c'hoarzin*.

KLAODA

Petra a ra deomp ar Werc'hez Vari diwarbenn an traou a c'houlennomp diganez ? *Salaun ne respount tra*.

TUGDUAL

Ober a rez al leue ; mes finoc'h e vezimp egedout. Ha respount a ri evit mat ?

SALAUN

Ave Maria. *Jildas a zeu*.

X DIVIZ

KLAODA, TUGDUAL, SALAUN, JILDAS

JILDAS

Gortozit eun tamm, soudarded, gortozit. Petra zo diwarbenn an den ma ? Hen anaout a ran pell pell zo. Abaoue tregont vloaz pe dost, n'en deus ken ti nemet ar wezen gleuz a zo aze.

KLAODA

Trubarded zo er vro, dioc'h a leverer ; kemennet eo bet d'eomp kregi e kement den fall a gafchemp. Hennez a zo fall kenan e zoare.

JILDAS

Fall e zoare ? Sellit outan 'ta. Daoust ha gwelet hoc'h eus morse daoulagad skleroc'h ha sioulloc'h eget re ar paour keaz ma ? Hennez a reer anezan Salaun ar Foll. N'en deus great biskoaz ha ne raio ket biken an distera poan da zen. Hennez ne oar ober ken tra nemet goulenn eun tamm bara, na lavarret ken tra nemet *Ave Maria* pe, aweachou, *O Itroun Gwerc'hez Vari* ! Ne ket droukoc'h eget eur valafen-nig Doue. Lezit anezan da vont kuit.

TUGDUAL

Furcha a rankomp da genta en e c'hodellou. *Furcha a reont.*

JILDAS, o *vousc'hoarzin.*

Traou brao a gavot enno, sur. *Tenna a reont eus godellou Salaun diou goz kreunen bara hag o disteurel d'ezan dioc'htu.*

KLAODA

Kea, paourik, rei a reomp d'it da frankiz. *Klaoda ha Tugdual a ia kuit.*

XI DIVIZ

JILDAS, SALAUN

JILDAS

Selaou ganen, Salaun. Te a zo da zremm drouklivet bras, pemzek dervez zo, da nebeuta. Kroget eo eur gwall glenved ennout, me her gwel ervat ; ha n'oun ket souezet war gement se. Da di n'eo nemet toull eur wezen ; ien bras eo eur seurt ti ze, epad ar goanv dreist holl. N'ec'h eus ken boued nemet koz tammou bara zeac'h ha louet, re fall evit ar chas. Emaout o vont da wezel, mar choumez er stad se. Deus en hon ti, Salaun. Kavout a ri eno eur gwele tomm evit da izili paket gand an darsien, hag eur boued gwelloc'h kalz eget da hini, evidomp da veza paour. Ha dont a ri, va c'heazik ? *Salaun, hep komz a lavar nan en eur hejal e benn.* Ha ne ket me hepken eo, a c'houlenn diganez, evelse, ma teui gaeomp. Meur a hini, en hon touez, Inizan, Quiniou, Gouzian, hag all, kristenien vat holl, o deus kinniget d'it, evelvoud, eur gwele mat ha da vara pemdeziek. Deus en hon ti, Salaun. *Salaun, alao hep komz, a lavar nan en eur hejal e benn.* Mat ; va fedenn ne dalv netra d'it, her gwelet a ran. Mes dont a rin en

dro aman, dizale, rak hel lavaran d'it adarre, klanv out, Salaun, gwall glanv zoken. *Jildas a ia kuit.*

XII DIVIZ.

SALAUN, e unan.

Mont a ra d'e wezen gleuz hag a azez ebärz. Stouet eo e benn war e galoun. Huanadi a ra krenv gand ar boan. Lakaat a ra e zaouarn kroazet, hag en eur zevel e zaoulagad warzu an env, e lavar, gand eur vouez dinerz : Ave Maria ! Ave Maria ! hag, o kana eur seurt kanaouenig : O, O, O, O, O, O, Maria ! (2 w.). Eur sklerijen skedus a lugern en eun taol. Ar Werc'hez Vari a zeu, gant pemp pe c'hwec'h ealig ouz he heuilh. Salaun a zav gant poan bras, hag a zeu d'en em strinka war e zaoulin da dreid ar Werc'hez. Sevel a ra e zaoulagad etrezeg enni gant karantez.

XIII DIVIZ

SALAUN, AR WERC'HEZ, AN ELEZ

AR WERC'HEZ

Goanv ar vuez a zo echu evidout, va Zalaunig karet. En em gavout a ri, bremaik, gant an nevez amzer beurbadus, dirak an Aotrou Doue. En em gavout a ri etouez an holl zent. An Iliz Santel a lid o gouel hirio, kenta dervez a viz du.

SALAUN

O gwerc'hez a garan mui oc'h mui, ar sklerijen, ouz ho klevet, a zeu, en eun taol kount, em spered paour, hag e tigemeran, diganeoc'h, ar skiant vat hag ar gomz war va zremenvan. Mil ha mil bennoz d'eoc'h, rozen vurzudus eus liors Doue, rouanez brasoc'h eget an elez, stereden koantoc'h eget ar werelaouen. Ne ket gant va c'hlenved eo e varvan,

mes gant ar blijadur re vras a zifram va ene dioc'h va c'horf. Na perak 'ta kemend a vadelez em c'hen-ver ?

AR WERC'HEZ

Dre ma 'z eo da ene glan evel gliz ar mintin, e miz mae, va mignoun santel. Karout a ran start ar seurt eneoù ze. Karout a ran start an erc'h, ar c'houlmed hag al lili. Ar re a zo chomet dinam evel-dout a hed o buez, ar re ze a varv em c'hichen en eur dridal gand al levenez.

SALAUN

Mervel en ho kichen, mamm garantezus, ne ket eun anken eo ez eo, mes kousk eur bugelig e divreac'h e vamm. Ar maro er c'hiz se a zo eun dudi ha n'en deus ket e bar.

AR WERC'HEZ

Setu an dudi ze o tont evidout. Sell ouz va daoulagad gant da zaoulagad. *Salaun a zell ouz ar Werc'hez.*

SALAUN, *dinerz e vouez.*

O ! itroun muia karet ! Na c'houi zo kaer ! ho mousc'hoarzin a sked en ho taoulagad glas evel ar goulou deiz war ar mor. O ! gened dispar ! O ! me ho... kar ! me ho... *Salaun a varv. Ar Werc'hez a ia kuit, goustadik, war he c'hil, en eur zellet gant karantez oc'h Salaun maro. An elez a ia kuit ive, a gil.*

XIV DIVIZ

SALAUN, maro ; KLAODA, TUGDUAL

KLAODA

Sell ! ar c'hasker bara eo, gourvezet war an douar ! Daoust hag e ve maro ? *Oc'h heia Salaun. Ac'hanta ! paotr ! dihun 'ta, dihun !*

TUGDUAL

Ne finv tamm ebet. *O lakaat e zourn war galoun Salaun.* Echu eo. Ema ar maro gantan.

KLAODA

Mat ; ni hel lakaio en douar e traon e wezen gleuz.

TUGDUAL

Ia ; deomp da gerc'hat paliou da gleuza e doull-bez.

TREDE LODEN

An dra ma a dremen en hevelep leac'h an deiz warlerc'h maro Salaun. Bez 'ez eus e goueled an teatr, eul lilien bras meurbed ha gwenn kann. Pevar pe bemp paotrig a bed, o veza daoulinet, en dro d'al lilien. Jildas a zeu.

XV DIVIZ

AR VUGALE, MIKEAL, JILDAS.

JILDAS

Petra a ra ar vugale ma daoulinet holl en dro d'ar vleunen wenn ze ?

MIKEAL, o sevel.

Traou burzudus a dremen aman, na c'hellomp ket da goupren, tamm ebed an holl.

JILDAS

Ne gouprenan ket kennebeud na c'houi, bugale. Eul lilien o tigeri he bleunen d'an eilvet dervez a viz du ! Biskoaz n'eo bet gwelet kemend all !

MIKEAL

Bez 'ez eus traou kaeroc'h c'hoaz. Deuit da welet. *Jildas a ia.* War bep delien al lilien an daou c'her *Ave Maria* a lugern, skrivet gant lizerennou aour.

JILDAS, *souezet bras.*

Gwir eo ! Eur burzud santel eo, great gand ar Werc'hez, sur. Red eo hel lavaret e pep leac'h, ma c'hellimp meuli, holl a unan, an Itroun Varia.

MIKEAL

Hel lavaret hon eus, dioc'htu, d'an aotrou persoun. Deuet eo ; gwelet en deus al lilien, hag eo eat kuit da gaout buhan ha buhan an aotrou 'n eskob Kastel Paol. Lavaret en deus d'eomp chom aman da bidi en dro d'al lilien. Hen ober a reomp.

JILDAS

Ha n'eus nemet an aotrou persoun o c'houzout an dra ze ?

MIKEAL

Eo da. Kement den a zo er vro her goar ive, p'eo gwir eo en em skignet raktal ar c'helou dre ar vro. Gwelit ha n'eo gwir a lavaran. Setu o tont an aotrou rener kear Lesneven, soudarded gantan hag eur maread tud ouz e heuilh. *Ar vugale daoulinet en dro d'al lilien a zav.*

JILDAS, o sellet.

Petra levere, Mikeal ? Mar d-ema o tont an aotrou rener, eun all a zo gantan, eun all brasoc'h ha galloudusoc'h kalz egetan. Sell piz 'ta ! Sell piz !

MIKEAL, o sellet.

Petra eo ?

JILDAS

Petra ? An aotrou Yan, dug Breiz, hen e unan, a zeu gand ar rener. Ha ne welez ket e wiskamanchou kaer ?

MIKEAL

Eo, eo. Pebez braventez gantan ! *Yan Montfort a zeu, eur maread tud gantan.*

XVI DIVIZ!

YAN MONTFORT, AR RENER, JILDAS, KLAODA, TUGDUAL,
TUD DIWAR AR MEAZ, BUGALE

YAN MONFORT

Me a fell d'in, aotrou rener, gwelet al lilien ma
komzer anezi e pep leac'h abaoe ar mintin ma.

AR RENER

Deuit d'he gwelet, aotrou Dug. *Yan a ia.*

YAN MONFORT

Gwir eo evelato ; ken gwir hag estlammus e kreiz
an diskar amzer. Oc'hpenn, al lizerennou aour a
weler, war bep delien, n'int ket bet skrivet nemet
gand eur galloud en em gav en tu all d'hor galloud
ni. Bleuniet eo al lilien. Pegeit zo ?

AR RENER

Ne oa lilien ebet aze, aotrou Dug, deac'h da noz.

YAN MONFORT

Pe seurt douar eo, neuze, an douar burzudus ma ?
Petra zo dindanan ? Eur skeuden zantel bennak
goloet abaoe pell, marteze.

KLAODA

N'eus dindan al leac'h ma, aotrou Dug, nemet korf
eur c'hlasker bara, foll mik ha paour Job, hag hon
heus sebeliet en douar, Tugdual ha me, deac'h,
dioc'h ar pardaez.

JILDAS

Petra glevan ? Maro eo Salaun ! Ne ouien ket,
avat.. N'eus ket ezom mont pelloc'h, aotrou Dug ;
Salaun, ma read anezan Salun ar Foll, oa furoc'h

kalz egedomp ni holl. Eur zant e oa, eur gwir zant
eus ar re zantela. Eul lilien a zav war e vez. N'oun
ket souezet. Salaun a gare ar Werc'hez Vari muioc'h
ha startoc'h eget na garfe anezi n'eus fors piou ben-
nak. Hi eo, sur, he deus great ar burzud kaer a we-
lomp, en enor d'he servicher paour.

YAN MONFORT

Her c'hredi a ran. Deuet oun aman, evel a welan,
e poent hag en amzer. Dont a rean da Lesneven evit
traou a bouez bras diwarbenn ar brezel, mez ar
burzud ma a zo brasoc'h c'hoaz e bouez. *O sevel
e zaoulagad warzu an enb.* Mar teu ar gounid ganen,
ar brezel am eus a enep Charlez Bleiz, mar teu ar
gounid se d'in, Gwer'hez Sakr, a drugarez Doue ha
gand ho skoazel venniget ha galloudus, ober a ran
hirio, dirazoc'h ha dirak an holl, ar gwestl da zevél,
aman, en enor d'hoch hano, eun iliz ha n'he devezo
ket he far ! *D'ar re hall.* Piou ac'hanoc'h a fello
d'ezan rei dourn ha skoaz da zevél an iliz se ?

AN HOLL, *a bouez penn.*

Ni ! ni ! ni holl ! Enor d'ar Werc'hez ! Enor d'ar
Werc'hez !

YAN MONFORT, *sklear ha krenv e vouéz, e spered
o sonjal en amzer da zont*

He gwelet a ran ! He gwelet a ran, an iliz veur
ze, iliz ar burzud, iliz al lilien, iliz ar glanded, iliz
ar Werc'hez karet. He gwelet a ran, a bell, en amzer
da zont. He zouriau a bign, huel ha soun, dindan
oabl an Aotrou Doue. Bez' ez eus bleun kizellet
war bep hini eus he mein, garlanteziou dantelezet
oc'h pep hini eus he mogeriou. Ar goulou deiz a
darz ! An iliz a bez a zeu da veza eun iliz aour.
Sklderder laouen, an heol o sevel a dremen a dreuz
d'he frenestrou livet gant liou dudius ar ganeveden.
He c'hleier skiltrus a glevan o kana, holl a unan,

gloar Rouanez an elez ! D'an deiziou gouel Itron
Varia, e welan tregont mil, daou ugent mil den o
tiredi eus pevar c'horn Breiz. Mont a reont da bar-
douna da iliz dispar ar Folgoat. Gwerc'hez Santel !
me ho kar gant holl nerz va c'haloun. Roit d'in ar
pez a c'houlenan diganeoc'h, hag e likin hoc'h iliz
glorius da zevel. *O sevel e zourn. M'hen tou !*

AN HOLL, *a unan a bouez penn*

Hen toui a reomp ! Hen toui a reomp !

YAN MONFORT

N'oun ket souezet, Breiziz vat, gant ho karantez
evit ar Werc'hez Vari.

AR REÑER

Ha breman, mar plij ganeoc'h, aotrou Dug, kana
a raimp, holl a unan, *Kanaouen al Lili*. Savet eo bet
ar ganaouen ma hirio, mintin mat, kerkent ha ma
oe anavezet ar burzud, gant Kolomban, manac'h
koz ha santel, bet gwechal mestr skol d'ar paour
keaz Salaun.

KANAOUEN AL LILI

War don : Patronez dous ar Folgoat

AN HOLL, *a unan.*

El liors, epad miz even,
Dindan an heol skedus,
Pa vez bleunvet al lilien,
Nag hi a zo dudius !
Plijout a ra d'an elez.
Rouanez gand he gened,
Hi, oc'hpenn, a zo ivez
Rouanez gand e glanded.

Kaer eo, henvel ouz eur verc'h,
Ouz eur verc'h yaouank flamm ;
Gwerc'h eo, kerkoulz hag an erc'h
A jom atao dinam.
Skeuden goant ar yaouankiz,
Me a gar da wender
Da galounig leun a c'hliz,
Da zae leun a sklerder.

Holl omp ama d'ho meuli
Mamm vat ha dous meurbed
C'houi eo lilien al lili,
Gwerc'hez ar gwerc'hezed,
Ni ho ped, o bleunen c'hlan,
Evel Salaun ar paour,
'Vit m'hor bezo, eveltan
Ene gwenn, kaloun aour.

Ar goel a zisken.